

KIMIADOU

182

AR

# GARD MOBIL

WAR DON :

**Ar seiz skiant naturel.**

Nimp a lavar kenavo enn eur guitad hon bro,  
Tostañt oll tud iaouank, ha tado ha mammo ;  
Tostañt merc'het iaouank da glevet hon c'himiad,  
Kleoit paotret 'r Guinkis, deus parous 'r Houarc'had.

Nimp, paotret ar Gard mobil, hal larda hon boto,  
Da c'hortoz ma vo red dimp starda hon c'horeo  
Da bartia ive war lerc'h ar goukrivet,  
Rac ar brezel o vo stard, herve ma meüs klevet.

Nimp a lavar kenavo da guentan da Guinkis,  
Rag enn hon bugaleaj, a hed hon iaouankis,  
Enn-hi omp bet zavet ha maguet dizoursi,  
Ha pa vimp ebars er boan, zur a zontfomp enn-hi.

Kenavo a lavaromp ive d'ann oll jeuio  
A c'hoariemp nimp gwechall gant hon c'hamarado,  
Carto, boulo ha quillo, holl e hint a goste ;  
Kenavo d'ann oll jeuio a oa enn hon c'hontre.

A pebez kalonal, evit eur paotr ugent bla,  
Tremen hep gonid netra enn he amzer wella ;  
Kuitad ar pardonio, ann ebat hag ann dans,  
Ha c'hoaz koll he liberte, na pebeuz da droug chans.

Neuz ket c'hoaz peder zun, e moamp nimp ar greden  
E oamp staguët, er vro man, evel gant eur chaden ;  
Mez ar sort chadenno a zo fragil meurbet :  
Eur baret awel deus ar Pruss e neveus he zoret.

Ganet ebars er vro-man, nimp a vevoe enn-hi ;  
Evit aour nag evit arc'hant na guitajem out-hi ;  
Ar Prussiged infam hon forse da voaet,  
Mez malheur a vo dezo : na vezint ket espergnet.

Arsa, hon breudeur iaouank, tristan tra da welet :  
Mignonet ho partian ann deio tremenet ;

Ar vamm baour dezolet hag ann tad glac'haret,  
Ar vamm baour, 'n eur welan, a lare d'he bried :

Bemde, me zeblant din goelet ma buguel  
Treuzet gant eur voulet pruss dalet da vervel ;  
Na neuz 'vit he gonzoli ann disteran mignon,  
Oh, Doue ! pa n'eum zonzjan, ranna ra ma c'halon.

Ann tad paour, enn eur welan a lare d'he bried :  
Te a zo diavis bras o vean ken genet ;  
Doue ann Tad zo mestr, na bermeto ket  
E vefe hon mab lannik treuzet gant eur voulet.

Ar vamm c'ha d'ann daoulin dirag imaj 'r Werc'hez :  
Oh ! Mamm dener, emezi, diwallet lannik kez,  
Digasset anean c'hoas eur veach d'ar ger ;  
Oh ! bet truez diouzin, ma Mamm dous ha tener.

Kenavo a laromp dec'h, tud iaouank hon c'hontre,  
Diez a c'heo hon c'halon, ha glac'haret bemde ;  
Kenavo, dec'h merc'het hon deus-nin anveet,  
Gant glac'har 'n hon c'halon, kenavo dec'h paotret.

Paotret iaouank ma c'hontre, a galon me ho ped  
Da gonzolin ma mestrez p'he goelfet dezolet,  
Da gonzolin ma mestrez p'he goelfet he annui,  
Glac'haret eo ma c'halon o pellat diaout'hi

Arsa, breudeur iaouank, c'hui pere em c'heuillo  
Kals ac'hanomp a daveo ar memez mizerio,  
Pa vefomp ho repos dindan ar goabren,  
Gourveet dindan ar reo war ar memez plenen.

Pa vefomp ebars ar c'han hon speret deui d'ar ger :  
Nin a welo hon zado paour hag hon mammo tener,  
Enn korn an tan ho welan, glac'haret ho c'halon,  
Hag ann oll ebars an ti en dezolasion.

Mez Doue hon zikouro hag he Vamm ar Werc'hez,  
Da bellât deus hon speret ar sort tristidiguez ;  
Pa vo zinet ar peoc'h nin deui c'hoas d'ar ger,  
Ha loreet an drapo hag hon c'halon zeder.

Paotret canton Plouaret nin zo gwir Vretonet,  
Fe ha nerz hon zado koz nint ket c'hoas kollet,  
Ni zo nerz enn hon brec'h ha goad 'n hon goazio :  
Mil malheur vo d'ar Pruss bean deut enn hon bro.

Pa vefomp ebars ar verv, enn kreiz tan ar brezel,  
'N em ganna 'vel leonet, paotret iaouank Breiz-lzel,  
Groet ma laro ar Frans, enn amzer da zonet :  
« Manket eo bet ar Pruss da facha ar Vretonet ! »

*Propriété de l'Éditeur.)*

# KANAOUEN

## GARD MOBIL

### LANNHUON

War ann ton gallek :

Je suis natif du Finistère, etc.

Na demp da Lannhuon da vale  
Da welet c'hoas hon mignonet,  
Nimp a welo paotret hon c'hontre  
Gai a joaüs e zint bepret.

Ar Gard mobil zo dastumet  
Enn Lannhuon a zo goerset,  
Zo nerz enn ho goazio } *bis.*  
Evit difen ho bro.

Er guer, aman, nimp zo glac'haret,  
Karguet a labour noz ha de ;  
Hon tad, hon mamm, er guer, zo genet  
O sonjal enn ho bugale.  
Ar Gard mobil, etc.

Paotret iaouank, c'houi na zonjet ket  
Petra c'heus gret d'ho mamm, d'ho tad ;  
Ho c'halono c'hui a c'heus leret  
Pa o c'heus renket o c'huitad.  
Ar Gard mobil, etc.

Ann oll diez er vro zo boulc'hed  
Ha trist eo ann treo tro war dro ;  
Eun dra benag a vank enn oaled :  
Skabel ar paotr a zo goullo.  
Ar Gard mobil, etc.

Iannik, Jakes, Pipi ha loen  
Ne glevet ken ho c'huitellat,  
Ho tigas ar c'hezek enn draouien,  
Pe d'ar lannek, enn bord ar c'hoat.  
Ar Gard mobil, etc.

Echu he c'heo d'ar c'hanouenno,  
Joaüsted ar vro zo kollet ;  
Echu he c'heo ive d'ar jeno,  
Da Lannhuon int partiet.  
Ar Gard mobil, etc.

Er Gard mobil, zo enn Lannhuon,  
C'houi a welo cal a weraset,  
Paotret hag he deus ners ha kalon,  
Na deus ket aounn rak ar Prusset.

Ar Gard mobil, etc.

Ia, bean a zo zur kals aneze  
Hag a lavar memes tra :  
Penos he int kontant da vade  
Da difen Frans deus ho goella.

Skoop ar pas, nimp, Bretonet,  
Demp da zikour hon mignonet,  
Nimp a meun ner ha kalon } *bis.*  
Evel eur guir Vreton.

Oll aman e mimp-nin mignonet  
Pe vreudeur ebars ann arme,  
A glevomp laret a zo foulet  
Oc'h ober d'ar Pruss mont adre.  
Skoop ar pas, etc.

Koulskoude, breman meus ar greden,  
E tefomp abenn aneze,  
Evit ma nom gloe ar Fransijen  
Nimp iel da Berlin da vade.  
Skoop ar pas, etc.

Hon tadou koz, aman, eun hon bro  
A eure d'ar Zaos mont 'n he route  
Hag e vije torret ho fenno  
Da re a c'hellent da dapout.  
Skoop ar pas, etc.

Ann tadon koz a ress burzudo  
Kouls war vor evel war douar,  
Ha dre oll eo skrivet ho c'hano  
E renk kentan, 'vel tud dispar.  
Skoop ar pas, etc.

Nimp a vank demp ober d'ar Prusset  
Evel ma eure ann tadou koz :  
Skei war ho fenno tollio kalet  
Evel ma oa bet groet d'ar Zaos.  
Skoop ar pas, etc.

Allon, eta, kourach Bretonet,  
Pa e zomp breman Fransijen,  
Ha demp da zikour hon mignonet  
Da baka hon enebourien.  
Skoop ar pas, etc.

(Propriété de l'Éditeur.)